

Chanson Nevez Potret an Arc'hant

Var eun ton charmant

Pa em beus cavet matier e teuan da implija
An nebeut speret a meus evit gallout rima
Eur ganaouennic nevez var boez an dud yaouank
A velan e n'em henti bars en amzer bresant

Etre an oll e cavan daou e particulier,
Eb digeri va ginou da lavaret gevier.
En nem gar en onestis a gant fidelite,
Ag a vo sur unisset, met o sud ho hersfe.

Mes ebars an amzer-man, vel mer gouzer erfad,
Ne e-timer muy an dud ma n'o defe yalc'had.
Eur yalc'hat a ve trec'h eur reng a bemp cant scoet ;
Mar o peus tout an dra-ze, c'hui o po do souet.

Bet zeus bet eun amzer, mes brema ne ma muy,
Ar re gos ho deus guelec hag o deus contet din,
Ne glasquent met tud renquet dre o c'homportamant,
A breman na seller muy nement deus an arc'hant

Pe c'houi vo den a feçon pe c'houi ne veot quet,
Na po netra da sonjal, mar n'o peus dec mil scoet.
Goulennit ag o pezo an hui o po c'hoant.
Na neus quet a zargoutou vit potret an arc'hant.

Me am beus bet remerquet, a goelet ran atao,
Pa ves quistion d'ober dimisiou en em bro.
Ez eo potren an arc'hant e ve choazet bepred.
Lec'h ar re all ne gavont met eun treuch col da lipet.

Estonnet on coulscoude o tonnet da gompren
E zeus quement a atach vit ar madou moudeu,
Hac guelec a ran bemdez tud o von deus ar bed :
Na ya met eur gos lincer gante en ho archet.

En despet da guement-se e vo cavet bepred
Cals a dadou a mamou, ag eb scrupul ebet,
A c'hanpec'h ho bugale da guemeret o c'hoant,
Evit kemer eur barti eneb do santimant.

Me e meus gret va unan, ha dre expérianç.
N'a neus quet c'hoas pel amzer ma poursuen va chanz.
An avaristed, allas ! laca empechamant,
Ag ar separation etre an dud yaouank.

Me moa choazet da vestres eur plac'h honest meurbet
Pehini a garen sur, ya, dreist an oll verc'het,
Ag e c'hallañ lavaret a memeus assuri,
E voa ker fidel din evel ma voant dezi.

Bet e zomp eur pennad mad, ouz n'em zampredi,
Epad eur blavez pe zaou, marteze memeus tri,
Ag or doa credet parfet s vijemp unisset.
Mes e creis hon esperanç, e zomp bet separet.

Epad hon entretien, e parlantem bepred
Eus an opposition a alfemp da gaved
Demeus abers hor c'herent, abalamour d'hom, ivez.
Rag ar yalc'had scanva a oa euz va c'hostez.

Ag ar pezh hon doa songet a zo bed arruet.
A ben eur pennad goude, e zeo bet prononcet
An arret a zisparti entrezom-ni hon daou,
Colet hon deus hon amzer ag uzet hor boutou.

Pa oamp ni e nem gaved en eun tu a goste.
Eur vech e particulier, hi lavaras din me.
An daelou ne daou-lagat, he mouez anter troc'h et :
Allas ! e mei, va mignon, nimp a vo separet.

Un den so deut d'am goulen ag en deus fors arc'hant
Me a ranko en quemer ha nan 'nhini meuz c'hoant.
Me zo c'hoas merc'h minores ne meus met naontec vla ;
Non quet mestres ma hunan ; ret eo obeissa.

Mes c'hui tadou a mamou perac e exercet,
E kever ho pugale eur pouar difennet.
Ne n'och-quet quen ignorant quement na oarfec'h quet
Ar pezh a rer evelse zo eur c'has reservet.

Rag ar Brovidenç divin o devezs destinet
He chanc da bep crouadur, pa zeo deut var ar bed.
Ha c'hui tad, ha mam dinatur, c'hui o c'heuz 'ta sonjet
E commandit an hini o devezs o crouet.

Ho pugale zo dezhan muioch eguet deoc'hu.
A pa resistit outhan alies e errue
E vellit o pugale en eur vrasa miser.
Daoust dar bernou arc'hant a deus en ho seyer.

Guelet reomp exemplou dirag hon daou lagat ;
Bugale rei ho mallos d'ho mam coutz a d'ho zad.
Dre m'a deus o contregnet, ep aoun da gaout pec'hét
Da rei ho dorn d'ar re ne oa d'hezo gleet

Clevit comzou an den fur o parlant evel-se :
Eun dimizi mad, ha gred dre volonteze Doue
Zo eur barados terrest ; mes an hini ve gret
Dre an arc'hant a zo eun ifern anticipet.

Perac c'hoas tad dinatur, a c'hui mam obstinet,
E forcit ho pugale da zont da guemeret,
Tud ag a rei ho malheur entre ha ma vont-hi,
Hac a vezo siouas caos dezo d'eu eun zaoni.

C'hui vir eus ho pugale da guemeret ho c'hoant,
Evit dont d'ho dimezi, me lavar d'an arc'hant,
O dorn o devezs roet met o c'halon deus quet,
A birviquen plijadur n'o do muy var ar bed.

Neo quet vidon va unan lavaran quement-ma,
Rac me zo etablisset eun tamic zo dija.
Ag ar plac'h am beus hantet so ive demezet,
Gras dei da vezaeurus atao gant e fried.

Me e garfe retorn brema var va amzer basseet.
Vit n'em zisposi gueloc'h en hini da zonet,
Mes allas ! va mignonet, ne eller birviken.
An hini a vez et cos ne all dont yaouank ken.

Mes c'hui oll potret yaouank, pa noc'h demezet c'hoas.
 En avis a roan deoc'h : pa zeot d'ober o choas.
 Sellit atao en o renk, a non pas huelloc'h
 Gant aon da dapat lamou ac ve noazus deoc'h,
 Ha c'hui tudigou yaouank, pa o peus an amzer,
 Considerit eun neubet, a c'hui a velo scler.
 Pebeus chenchanmant a zeu goude an dimei :
 An tourmant ac ar glac'har, an irvout an annui.
 Mar meus c'hoas eun avis da rei deoc'h, mignonet :
 Eo ma teufet da zioual dre ma moc'h o'hoas karet
 Na ve ho calon charmet dre ar faoz amitie,
 A mar hueillet va c'hentel, c'hui vo furoc'h a ze.
 Rac ar merc'het yaouank-se a so trompus meurbet.
 Na ziscouezont med eun tu ; an tu all vo cuset.
 Me lavar : eur plac'h yaouank so evel eur rosen,
 Pehini en dimezi a zistro en eur spernen.
 Finissa ran va chanson, gant eur galon laouen.
 En eur bedi tad a mam da zonet da gompren,
 E zeo guelloc'h union entre an daou bried,
 Evit an disunion gant oll vadou ar bed !

CHANSON DAOU DEN YAOUANK

Var eun ton Nevez

Mar gallan gout ar feçon e ranqua ncomposi
 Eur chanson ag eur c'henviad herve va fantaisi,
 Var sujet daou den yaouank, tud a gondition
 Estimet en ho fares gant an dud a feçon.
 Ne voant nemet unec vloas pa int bet commencet.
 Ha dre oll en em gaven en hent gant ho loenet,
 An hini vije goasa eguile he sicoure.
 Ber e kaven an amzer o tremen ho bue.
 Pa oan daouzec vloa echu int eat er catechis.
 Ha dre oll en em gaven : en hent hag en illis.
 Beteg ober ho zri fasq e mesk ar vugale.
 Bep bloa e cresp eur mail e chaden ho amitie.
 Er bloa var lerc'h ma int et er mes ar c'hatechis
 E hint commencet ho daou da roul ho yaouankis.
 He c'hondai rea d'ar guer deus a beb assemble,
 Evel daou den unisset en illis gant Doue.
 Ho zud ho velet ar merq eus ho fidelite.
 A soujas ho separit ant eil deus eguile.
 Ar plac'h a ya dar gouen, peder leo dioutau,
 Evit ma c'hancounaje beza fidel dean.
 Pa int bet dispartiet an eil deus eguile.
 Ne souje quiet gant ho zud ho devoa finisset,
 Ar goas a ouie scriva ac a gas lizerou
 Eur veach ar sizun ressus, da glevet he c'helou.
 Pa echuas an amzer e teu ar plac'h er mes.
 N'ho devoa quiet ar pouar d'he ober leanes.
 Hac en em c'heuilten dare, evel an eur guenta ;
 Eur garante ne voa quiet evit e distruja.

Betec eur bloa var'n-ugent in bet en em heuillet;
Quen a erruas an urs da denna dar billet.
Neuze o deus renoncel d'ar plijadurezo
O doa bet assambles dre an assambleo.

Pa entre an den yaouank er gramp evit tenna
E santas e oll vemprou e gommaç da grenn,
Hag e soujas tenje eun numéro izel.
Hag e rankje separi eus he vestres fidel.

Hasten a re e zorn pa arruas e renq.
Hac e tigoas gantan an numero ugent !
Ceta mantret e galon a beuzet en glac'har.
Quen a garje e vije et divar an douar.

Pa voa annoncet dezi, gant e gamarado.
Penos en devoa tennet, a pe seurt numero,
E lavaras a voes huel : aroc ma partije.
E heljet e lianan ac e lacat en e be.

Ar zul arog ma partije o deus quimiaded.
O ton deus ar gousperou int en em rencontret ;
An daelou en ho daoulagat a c'hlebie ho dillat.
E coste ar c'hleus pa oan o c'hober o c'himiad.

Abaoue hon bûgaleac'h, ma mestrezic fidel,
E somjamp e oam c'hoas, gant Doue eternel
Evit bea unisset an eil gant eguile,
Queit a ma vijemp leset er bed-ma en bue.

Hon daou o voamp o veva er memes santimant
Ha ma speret emezi e voa paraillamant
Me sonje din na vijemp birviquen separet,
Quen a bliche gant Doue on c'has divar ar bed
Abalamour da Zoue, e ranquan partial.
Evit merq ar garantez ouzoc'h e c'houlennan
Ar mouchouer so ganeoc'h o sec'ha o taelou.
Ma ellin sellet outan beteg fin va deiou.

Demeus a greis va c'halon, emei, va mignon ker.
E c'hastenan, d'ech va dorn da rei ar mouchouer.
Lequet-han en ho colet a dalc'hit mad dean.
Mar o peus soulajamant o toud de visitan.

Tachit den em gonsolit queit a ma veot et kuit :
Ne vo quet hir o conge deus a liou a zougil.
Car ben penzec de aman ac an de a birio.
E vo peb hini ac'hanomb o repos en e ve.

Credi a ran fermament ar pes a lavarit.
Rag evel ma c'herruin er guer a Sant-Briec.
E c'houlennin eur billet da vout d'an hospital.
Ac'hané vin transportet a laquet en douar.

Didant ar pevar devez ma voa bet partiet.
Eo marved ar pl'ach yaouank, ea guer ac interred
Daou devez just goude e c'herrue ar c'helou
E oa maro e mignou : Doue d'ho fardonno.

Queit a ma vev an eil den e glac'har d'eguile.
Ne quet echu ar respect, hac ar fidelite.
Goulennomp oll ar gallout da vea recevet.
Gant Jesus hac ac ar Verç'hes ebars an evurustet.